

KANTIK SANT YANN BADEZOUR

* Var don : *Na neuz ket e Breiz.*

DISKAN :

Jezuz he-unan, Jezuz hen lavar :
Sant Yann Badezour na neuz ket he bar (bis).

An El Gabriel da Zakariaz
A annons eur mab, a vo santel braz.

Doue he-unan, dre c'hinou an El,
A verk e vo Yann hano ar bugel.

Dre eur c'hraas dispar, 'rog ma teu er bed,
He ene dija zo dibec'h ha net.

Gant Doue oa bet choazet a-viskoaz
Evit prepari hent ar Messiaz.

D'he ziskibien ker e laro eun de,
'N eur ziskoue Jezuz : « Setu Oan Doue » !

He gomzou, he skouer d'an holl Juzevien
A zeske dalc'hmad ober pinijen.

Ne baouez da skoi war ar goal dechou,
A strink en ifern kalz a encou.

Kalonek e stourm 'vit ar burete,
Prest, 'vit he difen, da goll he vue.

Hervez bolonte eur plac'h dirollet,
Dre urz Herodez ec'h e dibennet.

O Merzer santel, sikour, ni ho ped,
Ma vo hon bue fur ha pur bepred.

Plijet hon diwall, dre ho pedennou,
A enep ar bed hag he zanjeriou.

El lec'h santel-man, aboue pell amzer,
Ho taouarn a skuill donezonou kaer.

Kalz, e danjer braz da goll ar gweled,
Gant dour ho feunteun zo bet parëet.

En hon daoulagad mirit sklerijen ;
Dreist holl 'n hon ene dalc'hit feiz kristen.

Sant Yann beniget, pedit evit Breiz,
Ma viro bepred sklerijen ar feiz.

EUR MISSIONER BREIZAD.

Imprimatur :

Kemper, 6 Genver 1908.

F. CORRIGOU, Vic. gén.

(Propriété.)